

104

Inauguration
 an Hent bras nevez
 Dimeus a Guemper da Vontroulez,
 an 8^e eus a vis Ebrel 1844.

(19)

Var ton : Francis, le bal va se rouvrir .

O deiz a laouenidiguez,
 Eizvet eus a vis Ebrel,
 Deiz eürus ! te laq' en hon touez
 Ar joa vrasa da c'henel... :
 Hirio e zeo inauguret
 An Hent-Bras eus a Guemper,
 Gant an Autrou Boule, Prefet
 Departamant Finister .

Autoriteou Montroulez
 Zo gant hast en em rentet
 Bete Gemper, gant levenez,
 Erit tizout ar Prefet.
 Varc' hoas en carros e teuint (20)
 Da Vontroulez assambles ;
 Ha dre 'r feñon - ze raint
 Ar peyz na rejot james .

Biscoas, a gred din, nep christen,
 Dre 'r Pinity, dre Briec,
 Dre 'r Feunteunioù, na dre Pleyben,
 Dre Vaspars, roc'h Trevezec ;
 Dre Blounesur-Menez, Pleyber,
 Carros, dilijanç, na post,
 Na velas sur e nep amzer
 A bell noe ivez a dost .

oh ! ma tefe hon Tadou cös
 Da velet menez - Are,

Ha da evessät mad penos
 Eus brema un hent pare !
 O joa a vez estranch meurbet,
 O anaoudeguez güirion,
 O trugarecät ar Prefet
 Ganeomp - ni a greiz calon .

Cetu ta hirio Gemperis,
 Dre ar brassa levenez,
 Unanet da Vontroulezis,
 Dre voyen an Hent nevez !
 Brema, certen, hac hep poannia,
 A Vontroulez da Guemper
 Ec'h ellimp monet da goannia,
 Ha c'hoas gemer hon amzer .

(21)

Mesqit ho mouezioù, Gempereis,
 Da gana meulodion,
 Gant hon re - ni, Montroulezis,
 Vit an autoriteou
 A deu hirio da rei deomp - ni
 Un hent caer hac êzet bras,
 D'ellout en em darempredi,
 Ar peyz n' hor bejomp biscoas .

Na vezot mui estranjourien,
 Pautret ar Menez - Are
 D'an niver a ^{veachourien} estranjourien
 A velot hep nep doare .

(22)

Ho contriou zo bueqet,
 Ho commereç a gresco prest:
 Bezit eta en joaiistet:
 oll eo en hoc'h interest.

Sant Mikel ! diouc'h lein da venez,
 Beill var ar beacherien
 A zarempred da hent nevez;
 Protech an oll gristenien.
 Gra ma rint o beach errad,
 Couz en deiz evel en nôs,
 Ha ma carint eur quele mad
 Erfin, da ellout repos.

Lun 8 Ebrel 1844. A. Lédan.

(Vol. VII, p. 19-22.)
 8 str. numérotées.